

SKOL

MEURZH 1958

NIV. 1

RUMMAD NEVEZ



DASTUMADENN A GELENNOURIEZH

P'hon eus kroget gant an dastumadenn "SKOL" e oa hor pal digeriñ an hent d'ar "Skol Vrezhonek" dre sevel studiadennoù diwar-benn ar pezh a oa bet sevenet war dachenn ar gelednadedurezh divyezhek er broioù bihan, hag embann testennoù a bep seurt mat da vezañ implijet er skol. C'hwec'h niverenn a zo deuet er-maez betek-hen. Teir a zo bet gouestlet d'ar studiadennoù ha teir all d'an danveziou skol. Gomet omp bet feal d'hor pal, met pell emamp c'hoazh diouz ar gont gant an testennoù.

Ha betu emamp krog dija gant un "eil erv". (1) Abaoe an 18 a viz gwengolo, ez eus bet digoret e Skol Sant-Erwan, en Ploueg-ar-mor, un doare Skol Vrezhonek. Hon eus ket gallet seveniñ hon huñvre penn-da-benn, met diougan mat a zo, ha, da heul, ar spi e teuy hon huñvre, re gaer evit ar mare, da wir un dro bennak.

Mar deo re abred c'hoazh klask barn hol labour, deuet eo ar c'houlz da reiñ da c'houlzout da vignoned ar Brezhoneg penaos hon eus klasket seveniñ hor mennad, petra a vennomp, petra a reomp.

Adalek bremañ, evit merkañ an "Eil Erv", hag evit abegoù a vureviezh, e vo SKOL an dastumadenn drimiziek. An niverenn-mañ a vo niverenn gentañ ar Rumad Nevez.

Ur wech ar bloaz e vo gouestlet un niverenn da Skol Sant-Erwan, un niverenn a-bezh hag a vo kaset d'an holl vadoberourien.

(1) Ar pennad kentañ war SKOL I a oa bet embannet dindan an titl: "A-raok kregiñ gant an Erv".

PRENIT.....
DIOUZHTU....
AN.....
NIVERENNOU
KOZH.....;



- SKOL I. Penaos kelenn ar Brezhoneg evel eil yezh. ar C'hembraeg e skolioù Kembre.
- SKOL II. Kelennadur ar Frizeg.
- SKOL III. Douaroniezh Vreizh.
- SKOL IV. 300 DIVINADELL.
- SKOL V. Rimadelloù hag Unan-gomzoù.
- SKOL VI. Kudennoù ar Skolioù er Slesvig.

200 lur pep niverenn.

BRUDIT SKOL. BRUDIT SKOL. BRUDIT SKOL. BRUDIT SKOL. BRUDIT SKOL. BRUDIT SKOL.

I. Bizh Vloaz a Stourm en ur Skol C'hallek.

E derou ar bloaz 1949, e voe kinniget da barrez Ploueg-ar-mor, gant an tiegezh de Foucaucourt, o zi-hañv e Rundavid, anvet gant "Kastell Bellevue". Bez' e oa anezhañ ur savadur ledan, ant adtiez e-leizh, ha liozhoù a-raok hag a-dreñv. Pep tra a oa digempenn, pe zoken ^{diougan} bezañ roet bod, e-pad ha goude ar brezel, da soudarded alaman, da baotred ar rezistans, ha da repuldi eus Brest.

D'ar lañ a viz here 1949, e tigore e "Kastell Bellevue", e-giz ma lavare an dud, ur skol gristen, hag a zo bet anvet e-pad pell "Skol ar C'hastell", hag a vez anvet c'hoazh alies "Skol ar Wreod". O vezañ ma oan kure er barrez abaoe 1945, e oa bet gouennet diganin bezañ ar rener kentañ. Asantiñ a ris: n'ouien ket d'ar mare moarvat pegement a drabas a zegasfe din ar skol nevez (1).

Net eo din anzav, memes tra, e oan dija dedennet gant an desavadurezh (2) hag ar berzh a rae ar Skolioù Kembraek Nevez. Santet eo boa, marteze, e kinniget din un dachenn-labour hag a dalveze ar boan evit: "DOUE HA BREIZH".

Klasket eo boa bet kelenn ar Brezhoneg e skol al Leanezed, a-drugarez d'ur renerez, a oa hag a zo atav, ur vignonez dezhañ. Hep kalz a verzh avat. N'ouien ket an tu. An taol-esa, neoazh, n'oa ket bet difrouezh evidon pegwir eo boa kroget da zeskiñ ar vicher.

Adalek an derou e klaskis reiñ ur spered breizhat da Skol Sant-Erwan. Mont a ris betek lakaat anv ar skol en Brezhoneg war ar siell, al lizhiri-die, ar bilhedoù - tombola; ha bremañ e c'heller c'hoazh e lenn war ar blakenn greunvean a zo bet staget e-kichen an nor-horzh. Dises e vefe bet din, en gwirionez, ober a-bend-all, ha ne gavis skoilh ebet war va hent. (3) Er c'hontrol, an dud a vez souezhet pa ne

(1) Anvet e oan bet da gure e Ploueg-ar-mor raktal goude va urzhidigezh, "da c'hortoz", "provisoirement" e-giz ma skrive din ar Vikel Vras "Frizek vloaz" zo abaoe, hag atav emaan kure.

(2) Me a gav din dre forzh lenn war "FREDERADENNOU...." Meven Mordiern ar pennadoù en deus skrivet diwar-benn an desavadurezh en Breizh-Veur hag en Amerika. Al levrv-me a zo unan eus al levrioù brezhonek a blij din ar muiañ, hag o deus graet din ar muiañ a vad. (Doue da bardono d'an oberour!)

(3) Ul lizher leun a ziamegañs goapaus eo eus bet digant un tourist a zegemeras, diganin, e-giz respont, va c'hartenn-vizit en Brezhoneg ha galv kuzul an Departmant da-geñver Devezh ar Brezhoneg.

lakaen tamm Brezhoneg ebet war va skridoù.

Diaesoc'h e voe din kelenn ar yezh; pezh a ris, koulskoude, adalek ar bloavezh kentañ. N'em boa ket dizollet c'hoarvezh en tu bug e-pad an daou vloaz warlerc'h. 1950/51 ha 1951/1952, ne voe ganimp kalz a vrezhoneg. E 1952/1953 hor bouc'hprientet mat a-walc'h Bleun-Brug Boulvriag (1953); hini Pleuvihan, e 1954; hini Kallag, e 1955. A-doug 1954/1955, an boa kelemaet ar vrezh 15 mm ben-deiz e stumm pe stumm ha gant berzh a-walc'h.

Diaezamantoù an boa kavet war va hent. Da gentañ a-berzh va c'hennvistri. Reiñ a ris da gompren dezho ne felle ket din, evit priz ebet, plegañ d'o sorc'hennoù.

D'an eil, a-berzh un nebeudia kerent, nebout a-walc'h e gav din. N'em eus ket klasket gouzout pet. Pe der familh a zeuas da gomz ouzhin: div vamm ha daou ded. An hini gentañ a ble-gas aes-tre hag he daou brotr a ra bremañ studioù mat er skol-etre. (1) An eil a lamma he faotr eus hor skol war zigarez e raen re a vrezhoneg. Din-mo, avat, e roas ar vamm un abeg all: fellout a rae d'an tad e heuliofe e vad ar skol ofisiel. An abeg gwirion e oa, moarvat, rak ar mero'hed ivez a voe tennet eus skol al Learezed na gelennet tamm ebet ar yezh. Ar re a a-naveze an afer o-deus bet abaoe un tammig fent: ar paotrig a zo distroet d'ur skol brevez ha bez' emañ kalz war-lerc'h ur paotrig all hag a roas emañ e studioù penna-da -benn. Netra ken! D'an daou ded e tapellegis ne felle ket din deskiñ ar Brezhoneg d'o mibien an deus. Hag e klasken stâv mad, ar vugale fiziet enno. (2)

Felllet en deus bet din danevellañ dre ar munud ar c'hrogadoc'h-se evit kennezhañ ar vistri a c'hellfe bezañ digalonkaet gant seurt skolioù.

Un diaezamant brasoc'h e'hoazh em eus bet d'hor gentañ a-berzh va skolidi: holl e oant bet savet en Gallag, estroget unan pe zaou. Ur c'hard bennak a gomprens mat a-walc'h, ar c'hard all un tamm bennak, hag an hanter diwezhañ nebeut-tre, pe netra. (3) Un dizo-loadenn a-abouez bras e oa bet eviton al kourioù bihan ruz embannet gant Departamant Kevreded Ministrerezh ha Deskadurezh e Londrez. Menozioù pennañ ar studiadennoù-se, ha frouezh va stant-prenet a vo kavet e nivarezh gentañ SKOL dindan an titloù: "Aergelc'h Breizhat er Skolioù" ha "Pennaos Kelenn ar Brezhoneg evel eil Yezh". (4)

(1) An hini henañ a c'honeze bep bloaz prizioù e kenstrivadegoù ar B.B. ha heuliofe en deus bet, e-pad ur pennad da vihanañ, skol vrezhonek e skol-etre.

(2) Aczet hon eus bet ur vedadeg gerent da studioù kudadenn amzer-da-zont ar skolidi. Danevellioù a voe embannet gant "Ouest-France" ha Kanadig ar Barrez: "La nouette du Goelo".

Unan eus ar baotred en doa ijinet d'e ded e oa gwelet fall dre na felle ket dezhañ diskriveriñ war e gader kensoc'h brezhonek. Dont a rae da gompren e oa plijusoc'h al labour-se eget pellaadennoù gallek! (Kendalc'h an notennoù war ar bajenn enep)

E derou ar bloavezh-skol 1953/1954, e oa bet diskleriet amañ ur bañsion, pe ur skol-lojañ e-giz na lavar ken brav Yann ar Gow en e levr epvorennoù. Adalek an deñ kentañ e kustumis komz brezhoneg ouzh ar bañsionidi. Hag a-benn ar fin em eus bet ar blijadur da welout un nebeudig eus hor skolidi barrek da vrezhonegañ gant hezaman. Meur a wech, koulskoude ez on bet war varr da fallgaloniñ. Met, etav, e teue d'ea broudañ skouer Bro-Gembre, va c'hardenn vrezizhek, an lakas d'esperout en amzerioù-welloc'h, ha lizhiri va mignoned. Setu amañ un tanva eus ar re a skriva din puilh ur mignon etre 1949 ha 1951.

"Un tamm truez em eus ouzhit ivez o soñjal er garg nevez a zo o pouezañ war da ziskoaz ha war da spered. Ne die ket bezañ gwall vourrus bezañ a-hed an deiz o kelenn friob-mic'hi! Un dra gaer ez eo avat ha spi em eus e tougo da labour frouezh e-leizh evit ar vro." (deiziad: 6/10/49)

"Sammet ez out hep mar ebet gant da labour a skol-er hag rener-skol ha setu perak n'hellez mui skrivañ din gwall-alles, droast ma rafe se kalz a blijadur din. Hogen bez sur n'em eus tamm droeg ebet ouzhit evit-se.

Spontus eo evelkent sar-tout war hor chouk pouez ur gevredigezh ha na garomp ket - gwask ur sevenadurezh hag a gasaomp, - samm un urzhiadur a gasomp disteurel diwarnomp... Ya, aczet ez eo ar gevredigezh hag ar bed a zo en-dro deomp en doare da SUNAN HON AMZER, HOR BURZ, HOR GUILIIGEZH, da zinerzhañ hor Bro, ha da greñvaat muioc'h a se ar vro all, er spered estren, gwashoc'h eget ar diu-jitau japanat hag a zo e reolenn-ziazez: implijañ narzh an enebour d'ober aroug dezhañ." (11/1/50)

"Dilun eta ec'h adkrog ar skol ganit hag e lec'h all evel just. N'eus graet netra na votet netra a-du gant ar yezh. Amañ evel en Iwerzhon n'eus nemet ar Sin-Fein (an "Ni Hon-Unan") a gement a c'heli degas an trec'h deomp. Ha den ebet ne gred kregiñ e pav an alar da verkañ ar roudenn: "betek amañ e teui ha ne di ket pelloc'h." Distourm kaer e vo lonket hor bro gan al lanv gallek...." (2:10/50)

A-daol-trumm e kemmas ar paotr e emzalc'h er skol, hag e dibenn ar bloaz e tremenas gant berzh an arnodenn evit ar 6-er klas hag ar yalc'had-studi.

(3) warlene, e miz here 1956, an boa bet ur blijadur da gaout ur skoliad bihan 6 vloaz hag en doa desket ar brezhoneg er gêr. E gerent a oa loro'h enno - lakaet e veze da gomz dirak an Aotrou Person hag an Aotrou Kure - hag an amezeien a veze banet gant e ouiziegezh! Bremañ ez eo unan eus va gwellañ skolidi. N'emañ ket c'hoazh em c'hlas, hag etresomp ne vez nemet Brezhoneg.

(4) An div studiadennoù-se a zo bet embannet en Gallag gant Kanadig ar Skolioù Kristen en Eskopti Sant-Brieg ha gant hini Eskopti Kemper.

An diskoulm am boa kavet, a soñje din da vihanañ, en Bro-Gembre. Tu am boa bet da weladenniñ ar vro-se e-doug vakañsoù 1949 ha 1951, d'ober anaoudegezh gant un nebeut kudennoù, met nebeut a-walc'h gant hini ar skol. (1) A-drugarez da levrioù bihan ruz embannet gant Ministrerezh an Deskadurezh en Londrez ha d'ar gelaouenn sizhuniek "Y GEMBR" e heuilhen emgann ar C'hembraeg er skolioù. E-pad vakañsoù Meurjarjez 1954 e teuis a-benn da beurechuiñ ur studiadenñ hag a oa pell'zo war ar sternañ: "ar C'hembraeg e Skolioù Kembre" (2) Kenerien div gelaouenn vrezhonek pennañ an amzer a nac'has embann va zanañ labour war zigarez n'oa ket diouzh doare o lennerien. Diwar se e krouis ar gelaouenn SKOL, a voe lakaet e gwerzh evit ar wech kentañ e Bleuñ-Brug Pleuvihan.

Vakañsoù bras 1954, daou viz a-bezh, a dremenis o studiañ ar skolioù divyezhek en Fryslân. Un danevell, a savis evit Ministrerezh an Deskadurezh en La Haye, en doa roet din ur yalc'had-studi, a voe embannet en niverenn 2 SKOL. A-raok kuitaat tachenn ar studioù e lavarin c'hoazh em eus bet graet un enklask heñvel er Slesvig, en Alamagn hag en Danmark, e miz eost 1955, hag e Bro-Gembre e miz eost 1956. Danevell ar Slesvig a vo kavet e SKOL VI. Hini va beaj e Kembre a chom c'hoazh da beurskrivañ; graet e vo hep dale rak meur a dra nevez am boa desket du-hont ha ret eo din adlenn va notennoù evit sklerijennañ an holl gudennoù a rankoñ diluziañ hiziv.

Skoazellet ez on bet c'hoazh em labour gant krouidigezh ur Bagad hag un doare Kerc'h Keltiek gant an Ao. Kure, an Ao. Trehion, gihidig eus Plouc' , war vevenn ar yezh. Dre ar Bagad ez eo bet tremnet ul lodenn vat eus paotred vihan ar barrez a baos 1953, ha mar n'o deus ket desket kalz a Vrezhoneg evit se, mirout a reont en o c'halon ur c'hreunenn vihan bennak a ziwano gwech pe wech. (3)

Ar bagad a vez skoret e-pad an hañv, da vere ar vakañsoù, pa vez ef gër ar "abudierien". Ne vez kalz a dud yaouank etre 15 hag 20 vloaz er gër a-hed ar bloaz. Holl e rankont diyroañ evit studiañ, evit deskif ur vicher, pe evit labourat. (4)

(1) E 1951, em boa kejet, e gar Chester, war ar vevenn etre Kembre ha Bro-Saoz, gant an Ao. Greenfield, M.P., ur c'hannad kembreat er C'humunioù, hag an hini koshañ eus izili ar Gembr-se. Dre se e vez anvet "Tad ar C'humunioù". Gant ar votadegoù diwezhañ e oa bet tremnet c'hoazh evel dileuriad ar Gostezenn Labour, ha pegwir n'eo ket bet gant war yaouankant, chom a ra moarvat "Tad ar C'humunioù", nemet hag ast e vefe d'an anaon abaoe; pezh ne gredan ket.

(2) Embannet e SKOL niv. II.

(3) Er Bagad a v-ez degemeret paotred eus skol Sant-Erwan hag eus Skolioù ar Gouarnamant, teir anezho er gumun.

Darempredoù mat-kenañ am eus gant holl baotred skolioù ar gouarnamant. Katekiz a ran bep yaou dezho holl, war-bouez nebeut, pa vezont etre 6 ha nav bloaz.

(4) Al lodenn vrasañ eus an dud a vev diwar ar Verdedurezh Kenwerzh.

gantet ez eo bet abred Levezon ar Bagad hag ar C'helic'h war vuhez ar barrez. Addigoret o deus bet dorioù an iliz d'ar c'hantikoù brezhonek hag addihmet e meur a galon un tamig karantez evit ar yezh. Prezeget e vez en Galleg bep sul. Rlenn, da gontañ goul Sant Erwan, e c'houlennas beleien ar barrez diganin komz en Brezhoneg; va sarnon a blijas d'an holl, zoken d'ar re n'o doa ket he c'homprenet: evit an holl e oa un dra dereat komz en Brezhoneg gant ur seurt degouezh. (1)

Ma vefe bet renet e pep skol ur stourm e-vel hon hini, ez afe ar sacout buan a-walc'h gant ar Spered Breizhat. Ha perak ne vefe ket un deiz ? (2)

(1) E-keit ha ma "z on bet kure, - bremañ ez on " kure-skolaer " - , da lavarout eo e-pad 4 bloaz, em eus bet prezeget pep eil tro en Brezhoneg hag en Galleg. Bremañ ne gomzan koulz lavarout ken en iliz. Bep sul eo'h ofernann an unan pe unan eus div chapel ar barrez hag e komzan peurvuiañ en div yezh. Ar c'hantikoù hag ar pedennoù a vez atav ganimp e yezh ar vro. Ul levezon dreist-muzul a vez evidon klevout paotred Sant-Erwan, bodet en-dro d'an aoter o respont d'ar " Me Ho Salud Mari " ken naturel ha tra. A bell ' zo ne oa ket bet klevet kemend-all er barrez.

(2) Nevez ' zo ez eus bet lavaret din e oa e skol laik ar bourg ur mestr hag a roe poentoù mat, pe ur gopr bennak, d'ar skolidi a veze barrek da dreñf gerioù pe frazennoù 'zo en Brezhoneg. Unan eus mammoù al "loreidi " a boufe gant deska-mante mañ en ul lavarout : " Eilpennet eo bremañ pep tra er skol ! N'eo ket se, evel just a saveteio hor yezh, met sikour a ra da zisammañ ar vretoned eus ur c'hompleks ponner ha nozus.

notennoù ar bajenn 8.

(1) An Ao. Chaloni Boscher, ur Breizh-Uheliad didro, en deus ur spered lemm ha ledan hag ur ouizigezh don war an deologiezh, ar bred-rouriezh hag an dasavadurezh. Panevetañ ne vefen ket bet chomet keit da dorchañ o "frioù-mic'hi" da baotred Plouag ! E miz here 1956 ez eo bet anvet anner an Deskadurezh Keltiek en Eskopti. An aotre a zo bet nevezet din gant e wlaer'hiad, An Ao. Herri Gloaguen, ur Breizh-Uheliad, hag ur mignon mat d'ar Bleuñ-Brug.

(2) Testenn ar C'helic'h-lizher a vo kavet en dibenn, e-veak an dielloù.

bez ' e oa er vodadeg: Alan al Louarn, Pierre Lemoine, L. ar Floc'h, J. Kadoudal, P. Ewen, V. Seite, Kontez Rohan-Chabot, H. Rospabu, Per Denez, Yann ar Gow, Ronan Huon, V. de Ballaing, Milik ar Skañv, P. Erwan Moign, G. Tanguy, St. Gaffroy, A. ar C'hallvez, hag o deus ainet evel-se.

" Le Règlement est fait pour assurer le bien des enfants, s'il ne l'assure pas, il faut le modifier ". P. Boscher. ("Bulletin mensuel", niv. I, 1956/57.)

II. Ur C'hammed war-du ar Pal.

Va fennadoù-skrid a zedennas abred evezh ar stourmerien. Setu arroudennoù eus deou lizher a zegemeris e deroù 1955.

" Klevet em eus digant X... ez eo asantet sevel ur skol divyezhek e Keranna, Yverres. Ur "Revue" ho poa kaset din e oa meneget ur skol divyezhek Saozneg-Galleg e Pariz. Soñjal a ran neuze n'eus lezenn ebet a zifenn sevel skolioù e-giz-se. Perak ' ta ne vez ket graet?....

Dacoust hag-heñ e vefec'h-c'hwi a-du evit ren ar seurt skol, pe da ust hag ec'h anavezfec'h unan bennak a c'hellfe hen ober ?..." (26/2/55)

" Kredif ' ran ez eus aze da ober un taol-arnod hag a c'hellfe dougen frouezh: digeriñ ur skol hag a rofe d'ar brezhoneg ur plas frank ha diskouez e c'hellfe ar vugale a vefe enni dont a-benn er memes tra da c'hounit an holl diplomoù gallek. Kavet e ve, a gredan, a-walc'h a vugale dre Vreizh a-bezh evit ur skol evel-se, da lavarout eo un 40 pe 50. Petra ' soñjit ? Lavaret em eus da ne welan den all ebet gwelloc'h egredoc'h da ren ur seurt skol. Ret e vefe deoc'h avat kaout mistri dreist d'ho skoazellañ, rak ma teufe da fall an taol e vefe gwashoc'h eget bezañ graet netra." (19/4/55)

Petra ho pefe graet em plas ? nemet se-laou ar muezhioù ha sentiñ outo ! Gant ar soñjoù-se em penn ez is betek an 19 a viz mae 1955. An deiz-se e karnaris an tren bihan evit Sant-Brieg hag e c'houlennis digant an Ao. Chaloni Boscher, Rener ar Skolioù Kristen, an aotre da grouiñ ur skol-henchañ amañ. (1) An aotre a voe roet a galon laouen ha hep marc'hata. Diouzhtu e voe prientet ur vodadeg d'an 12 a viz mezheven, deiz gouel ar Sakramant. 65 kelc'hli zher a voe postet, 29 respont a zegemeris, ha 17 a dud a zeuas. (2) Da heul un tamm kaozeadenn graet ganin hag un diviz, e voe savet an danevell-mañ, aprout gant an holl, ha sinet gant 4 den a gemeras war o c'harz kiriegezh an afer dindan renerezh an Ao. Yann ar Gow, noter e Gouezeg. Setu-hi amañ dindan:

"Eun nebeut tud, bodet e Ploueg-Ar-Mor, d'an 12 a viz me
"zheven 1955, o deus divizet, gant aotre Rener ar skolioù
"kristen en Eskopti Sant-Brieg, sevel eur' skol-henchañ
"e Skol Sant-Erwan.

Eur c'hlas nevez a vo digoret evit ar
"vrezhonegerien a-vihanik, a vezo degemeret evel pafisioni-
"di. Ar c'hallegerien vihan a vo degemeret ivez, hag a zes-
"ko ar Brezoneg evel ail yez.

Eur Gevredigez a raio war-
"dro mizou ar c'hlas nevez ha gopr ar skolaerezh. Eur voda-
"deg da ziazeza ar Gevredigez a vo graet e-doug Bleuñ-
"Brug landivizio. An dud a garga skoazella a stumma pe
"stumma, pe kas o bugale da Skol Sant-Erwan, a zo pedet da
"skriva d'ar Rener.

(Gwel an notennoù war ar bajenn 7.)

" Yeun Ar Gow
" J. Kadoudal

Kontez de Rohan-Chabot
A. Ar C'halvez.

Divizet e voe, ouzhpenn, ober gant doare-akrivañ Vallée hag implijout al levrioù a vefe kavet war ar mare'had.

An aotre goullennet e koulz digant ar Bleuñ-Brug a zeuas kalz re zivezhat, ha ne voe ket tu da zegemenn bodadeg landivizio. Mont a ris ata-v betek eno ha d'ar sadorn 30 a viz gouere, da 17 eur, war-lerc'h ur kaozeadenn frouez diwar-benn an Ao. Perrot gant H. Kaouissin, e teuis a-benn, ur wech ouzhpenn, da zisplegañ va menoz dirak ur c'hant bennak a dud. D'am soñj ne voe divizet netra resis; ne voe da vihanañ diazezet kevredigezh ebet.

Ur bloavezh-skol a dremenas hag e-pad ar vakañsoù war-lerc'h e klaskis adloc'hañ an afer. Ur vodadeg a voe aozet e skol Sant-Erwan adarre, d'ar 24 a viz gouere 1956, da 16 eur, e-kerz Kamp ar Vrezhonegerien, da heul un emvod eus Bleuñ-Brug eskopti Sant-Brieg. (1) Diazezet e voe ur Gevredigezh, anvet ur C'huzul-Ren hag ur Rener nevez, resisat gopr ar skolaer, ha kinniget ar plas d'un den eus an emdard. (2) Un nevezinti a-bouez brasoc'h c'hoazh moarvat: evit ar wech kentañ em boa dirazon un tad a familh hag a felle dezhañ kas dimp e vab lo vloaz. Betek neuze ne oa bet kinniget din nemet padotred re yaouank pe verc'hed. Siwazh n'eus ket bet tu da grouiñ ur "skol gemmesk" dre ma n'eus ket unan a seurt-se e bourg Ploueg. Hag ouzhpenn, ma vije bet tu da zigeriñ unan, e vije bet ret serriñ ar banelo ! Skouln Gordios, moarvat, n'oa ket diasoc'h da zizober !

Ar bloavezh-skol 1956/1957 a grogas da hanter wengolo 1956 ha n'em boa dinaizhet skolaer brezhonek ebet. Ha tremen a ris ar bloaz o klask unan, pegwir e kenskrivis gant 5 den en amez. Santout a ran e oa ret mont war-raok: al lizhiri an boa degemeret hag a zegemerent gwech an amzer hen displege sklaer. (3) E miz mae e tivizis digeriñ, koustet a gousto, ur skol vrezhonek e miz here 1957. Lakaat a ris moulañ papereñnoùigou en Brezhoneg hag e Galleg, hag a voe kaset d'an holl gelaouennoù vreizhek, da goumansterien SKOL, ha d'un nebeut tud hag o doa pendra da skoazellañ an oberenn pe vugale da garga d'ar skol.

(1) Kamp ar Vrezhonegerien a zo bet dalc'het 2 wech e Skol Sant-Erwan, e 1952 hag e 1956.

(2) An Ao. Yann ar Gow a ziazezas e garg evit abegoù a yec'hed. Un anaoudegezh vras a dleer dezhañ evit bezañ asantet adalek an deroù paeroniañ ar Skol Vrezhonek.

An Ao. Yann ar Beg a voe anvet da Rener. Pallat an deus bet dezhañ seveniñ penn-da-benn deverioù e garg. Ret em eus digantañ dalc'hmat skoavell a bep seurt hag alioù mat. Dont a ra gwech an amzer da welout penaos e kerzh an traoù.

(3) Arroudennoù eus al lizhiri a vo kavet da heul, ha bez' a vint sur-mat unan eus al lodennoù plijusañ da lenn eus an ti-verenn-mañ.


Evit chom feal d'ar pezh a oa bet divizet d'an 12 a viz mezheven 1955, e voe implijet evit an destenn vrezhonek doare-akrivañ Vallee. Dre zievezhted, en abeg d'ar boaz am eus d'obet gant ar "Peurunvan", e lakais ur -ZH, er ger Roazhon; ha tri a-walc'h evit scouzhiañ ha nec'hañ un nebeut tud! (1)

Ar bruderezh gwellañ a voe graet gant ar gelaouenn "AR VRO" hag a gomzas e pep niverenn, adalek miz mezheven, eus Skol Vrezhonek Sant-Erwan. Doue hepken a oar pegement a vad he deus bet graet e-giz-se ar gelaouenn-se d'hon oberenn ha din va-unan.

D'an 21 a viz gouere e teuas betek egnon ur c'helou mat: an Itron Galbrun, anavezet mat en amsav, a sante dont e Skol Sant-Erwan evel skolaerez vrezhonek hag evel gouarnourez ar bañsionidi. E derou miz gwengolo e tremenis dre Pariz, en ur zistreiñ eus Essen, Alamagn, hag e voe peure'hraet an divizoù etrezomp. Gwerzhañ he stal-luc'hskeudenniñ ha dilojañ a c'houlennas di-anti kalz amzer, hag e dibenn miz here hepken e teuas da Skol Sant-Erwan.

D'an 11 a viz gwengolo e oa pemp skoliad war ar roll: 1 eus Roazhon, 2 eus Dinan ha 2 eus Ploueg-ar-Nor, hag a oa bet an daou gentañ. Pemp galleg e oant avat! Het mat e oa din pakañ ur brezhoneger bennak em roued ha me da gas ur c'helic'hlizher d'un nebeut tiegezhioù hag a anavezzen mat (2). Ne gollis ket va foan. 14 paotr am boa enskrivet a-benn ar 24 a viz gwengolo: 4 eus Ploueg, 3 eus Kemper-Gwezeneg ha 6 eus an diavaez. Da c'houde e teuas un toullad reoù all, en o zouezh div blac'hig a zo bet lakaet e pañsion e Skol al Beanezed, hag a vez roet dezho kentelioù brezhonek gant an Itron Galbrun. E-pad an trimiz gentañ e kouske ul lodenn eus ar baotred er bourg. (3) Diskleriet ez eus bet hervez al lezenn un hunva nevez hag e loj bremañ an holl er skol.

- (1) Gwel an destenn en dielloù.
- (2) id.
- (3) Ar re a gouske er bourg a oa hepken hanter-bañsionidi e-keñver al lezenn.



G O U R C' H E M E N N O Û.

En anv "SKOL" hag en anv he lennerien e kasomp hor c'halonekañ gourc'hemennoù d'an Aotrou ANDREV GUILCHER, hor c'henlabourer, gwechall mestr-kalenner e Skol-Veur NANCY, hag a zo bet nevez anvet e Skol-Veur ar "Sorbonne" e Pariz.

Spi hon eus hor bo hep dale ar blijadur da welout eil lodenn e "Z-DOU RONINIZH".



III Krog omp hepken.

N'Hon eus ket tizhet penn-da-benn ar pal am boa merket e 1955.

Dilezet em eus ar skol saoznek pemdezitek. N'eus ket bet tu da c'hoprañ ur Saozneg ha re sammet ez on a-hend-all evit ober me va-unan al labour..

N'eus ket bet gallet kennebeut digeriñ ur c'hlas nevez da zeskiañ lenn, skrivañ, ha jediñ dre ar Brezhoneg da gentañ. Ar vugale azo bet kaset dimp a oa gallegerien pe re vras evit heuilh ur seurt skol. Met gwellaet eo bet kelennadurezh vrezhonek ar c'hallegerien a-vihanik hag ar vrezhonegerien vrasañ pegwir o deus 8 eur Brezhoneg bep sizhun e-lec'h an 3 e 30 a oa bet grataet da gentañ.

Brasoc'h e veze bet c'hoazh lod ar brezhoneg ma veze bet tu da fiziout er memes skolaer an holl gentelioù, ar re c'halleg hag ar re vrezhonek. Evit ar marevezh gentañ n'heller . . . goulemañ kement-se digant den ebet ha pa ranker kement da sevel kentelioù brezhonek ha, ober war-dro skolidi ken disheñvel dre an oad hag an deskamant.

Hor skouer a dle chom neoañ ar skolioù kembraek, kozh pe nevez (1), hag a gellenn ar Saozneg evel eil yezh hepken. Siwazh, ur wech ouzhpenn, n'eus ket tu da gerzhout war o roudoù, evit ar mare. (2) Ar Gembraegerien vihan a c'hell tremen o arnodennoù a-bezh en Kembraeg hag hor Brezhonegerien vihan a rank hen ober en Galleg!

Un dra a-bouez, ha n'am boa ket soñjet ennañ da vat a-raok, eo gwelout hor "skol vrezhonek" pleustret gant bugale eus ar vro, daoust d'o diouiziegezh vras eus ar yezh ha daoust ha vezont ket skoazellet kalz gant o c'herent er gêr. (3) Kement-se a ziskouez e labouromp e-kreiz buhez hor pobl, hag hon eus dija un tammig levezon warni.

Salv ma kresko ken na savo dre ar Vro a-bezh, an eil war-lerc'h eben, ur studad skolioù kaeroc'h, pinvidikoc'h ha brezhonekoc'h c'hoazh eget hon hini!

Armañs ar C'halvez.

(1) Eñvel a reer "skolioù kembraek nevez" ar skolioù a zo bet savet a-bell' zo er pastelloù kembraek, en hanternoz ar vro dreist-holl. Ar "skolioù kembraek nevez" azo bet digoret abaoe 1947 er pastelloù saoznek, er c'hreisteiz, hag er c'hêrioù saoznekaet.

(2) Ha n'eo ket arc'hoazh e vo wilpennet ar vash. Un tammig spi a lakañ c'hoazh koulskoude en danvez-lezenn amañ ar C.E.L.I.B. o ~~partikel~~.

Ne gouzder ken kennebeut eus an Enklask e Kembre? Perak ? Daoust hag e veze ivez snap apered Lezenn "Daixonne"?

(3) Unan anezho koulskoude a zo krog da gomz ar yezh er gêr.

DIBL 1.

Ploueg-Ar-Mor 2 a viz mezheven 1955.

Kenvroad ker, Aotreet ez on bet gant an Ao.Chaloni Bocher, Hener ar Skol-100 Krijsten en Eskopti Sant-Brieg, d'ober gant Skol Sant-Erwan ur Skol-Henchañ (école-pilote) Brezhonek-Gallek-Saozneg.

Setu amañ berr-ha-berr ar raktres am boa kinniget dezhañ hag a zo bet aprouet gantañ.

1- En 3 c'hlas e Skol Sant-Erwan, e vo kelennet ar Brezhoneg 1/2 eurvezh bemdez; hag ar Saozneg un 1/2 eurvezh all (e daou klas). Deskiñ komz ha lenn. Pezh a glasker ober dija e klas an Ao.Kalvez.

2- Ur c'hlas nevez a vo digoret evit ar vrezhonegerion a-vihanik, hag a vo degemeret evel pañsionidi. Dre ar B, e vo desket dezho lenn, skrivañ ha jediñ.

3- Ur vodadeg eus kerent skolidi "Sant-Erwan" a vezo graet e miz gouere gant an Ao.Bocher evel kadoriad, da zisplegañ dezho ar peragoù eus an taol-esa.

4- Evit kelenn ar Saozneg e-fedus e vefe tu da c'hopreat ur paotr yaouank eus Breizh-Veur pe Iwerzhon.

5 - Ret e vo sevel ur gevredigezh-familhoù d'ober war-dro ar "C'hlas Nevez". En he c'harg, e vo -kempenn ur sal en ur c'harrdi: dispignoù war-dro 200 000 l. -prenañ ar-beurei-skol: 80 000 lur evit 20 skoliad. (an arc'hant-se a vo vefe restaoleet d'ar gevredigezh tamm-ha-tamm gant skol Sant-Erwan.) -diskoulmañ kudenn ar bañsionidi. "Skol Sant-Erwan" evel Skol-bañsion diskleriet a zo aotreet da gaout 7 bugel hepken. -goprañ ur vestrez-skol. (an Ao.Kalvez a adkemerero klas an arnodennoù evit reiñ fiziañs d'ar gerent.)

6- Ar skol a-bezh, hag ar gelenadurezh, a vefe evezhiet dre ar munud gant an Aotrou Kalvez.

Notenn. Ar raktres-mañ a vo tu d'e wellaat en ur zero'hel kont eus all pep hini. N'eus forzh penaos ez eus un dra bennak d'ober war dachenn ar skol vrezhonek ha ret e vo diskoulmañ ar gudenn dez pe zeiz, an abretañ ar gwellañ.

Ur vodadeg a vo graet d'an 12 a viz mezheven 1955 e Skol Sant-Erwan. Tud'zo evel an Itron Rohan-Chabot, an Aotrou Floe'h, Pêr Denez ha RiHuon o deus dija prometet dont.

ROLL AN DENEZH: 12 eur pred e Skol Sant-Erwan, 14 eus Vodadeg. Danevell gant an Aotrou Kalvez. Krouddigezh ur Gevredigezh. Ar skol vrezhonek: kudenn an arc'hant, ar roll-labour.

Pedet ez oc'h da zont d'ar Vodadeg-se. Kasit din ho respont; ha skrivit da lavarout ho soñj. En doare-se e vo gouezet kalz a amezh.

DIBL 2.

KEVREDIGEZH AN DESKADUREZH NEVEZ.

Ur C'hlas-hencha, savet hervez spered Lezenn "Deixonne" war kelennadurezh ar Yezou Bihan, a vo digoret e miz here 1957 en Skol Sant-Erwan, Ploueg-Ar-Mor, C d N.

Ar baotred en oad da bleus-tri ur skol izel a vo degemeret evel diavaezidi pe evel pañsionidi. Roet e vo dezo, kement ha ma vo gallet, un deskadurezh dre ar Brezoneg hag ar Galleg, ha lakaet e vint da dremen arnodennoù ar stad: arnodenn-degemer er 6-et klas (eiz derez ha skoloekaat), arnodenn-degemer er 5-et klas teknikel, hag ar Sentifikad (C.E.P.)

Ar gerent o defe c'hoant da gaout displegadennoù resisoc'h a c'hell skriva d'an Ao.Kalvez, rener Skol Sant-Erwan, Ploueg-Ar-Mor, a yelo, diouz ret, d'o gwelout.

Ar skol a zo paeroniet gant "Kevredigezh an Deskadurezh Nevez", a zastumo ivez an arc'hant a vo euzum evit ober war-dro ar mizoù. Tri rumad izili a vo er gevredigezh:

- 1^o- an izili kevredidi, kerent ar skolidi, hep skodenn ebet;
- 2^o- an izili kenlabourerien, a bae ur skodenn a 4.000 lur bep bloaz;
- 3^o- an izili madoberourien, a bae d'an nebeuta bep bloaz ur skodenn a 2 000 lur.

Ar C'huzul-Hen: Yann ar Beg, kadoriad; Ktez de Rohan-Chabot, M.Gourlaouen; J.Droniou, sekretour; A.Ar C'halvez, teñzorier; Yeun ar Gow; F.Ters; J.Kadoudal.

(Troc'ha hed-ha-hed gant ar poentigoù)

ANO:

CHOMLEC'H:

a c'houlemm bezan degemeret e "Kevredigezh An Deskadurezh Nevez" evel ezel Kevredad Madoberour, hag a bromet paea bep bloaz ur skodenn ad'an teñzorier.

Deiziad:

Sinatur:

Kas ar respontou hag an arc'hant da : Abbé Armand Le Galvez, directeur Skol Sant-Erwan, PLOUEG. (C du N) C.C.P. ROAZHON 865 85.

DIELL 3.

KEVREDIGERE AR SKOL NEVEZ,

Skol Sant-Erwan,
PLOUEZEC. C D N.

gwengolo 1957.

Kenvroad ker,

gouzout a rit moarvat e vo digoret ur c'hlas-henchañ brezhonek e miz here 1957, en Skol Sant-Erwan, Ploueg-Ar-Mor. Ar skolaerezh a vo an Itron Galbrun, anavezet mat en Emsav.

Kla-skot e vo, ar muiañ ma vo gallet, kelenn ar Vrezhonegerien vihan dre ar Brezhoneg, ha deskiñ ar Yezh d'ar c'hallegerien. Holl e vint laeret da dremen o arnodennoù en koulz.

- 1- Ar skol a zigoro d'ar gwener 20 a wengolo. Ar bañsionidi a vo degemeret d'ar yaou.
- 2- Priz ar bañsion glok (gant an amann): 6 000 lur bep miz. Kannañ ha dresañ en dilhad: 500 lur ar miz ouzhpenn.
- 3- Ar vugale a gas ganto o dilhad, o lienaj, 4 liñsel ha daou ballenn-gwela. Pa vo yen an amzer e vo prestet dezho pallennoù all gant ar Skol.
- 4- Gant ar vakañsoù e vo kaset ar vugale betek gar Sant-Brieg.

Sol am eus ho pe ar vadelezh da gas din ur respont. N'eus forzh penaos e vefe talvoudus gouzout evit peseurt abeg n'hellfec'h ket kas dimo ho vugale.

Degemerit, me ho ped, aotrou ker, va gwellañ gourc'hemenoù.

Goude-skrid. Gwelloc'h eo, evel just, kas ar vugale d'an deiz merket. Mar n'hellfec'h ket dont d'an deiz-se evit un abeg bennek, e vefent degemeret n'eus forzh pe zeiz diwezhatoc'h. Skrivañ a-raok.

=====
Pedet omp d'embann.

Priz " D'Entente Culturelle Bretonne de la Région Parisienne" evit ur studiaden diwar-benn ur c'hanton pe ur gumun eus Breizh a zo bet reet d'an DIL LORIN, skoazelloarez, evit he labour war kanton Mesag (I. ha G.) ha d'an ac. F. Barzig, evit e levrioù gouestlet da v-Mur ha d'ar Roc'h-Derrian.

Tri labour all a zo bet prizet gant ar varmaien: hini an ac. Beleg Auffret diwar-benn e barrez, La Ville de Nonale; hini an ac. Danet diwar-benn ar radon, ha hini an ac. Le Clerc, diwar-benn ar Gerveur.

Labour an Dil Lorin a zo diembann; levrioù an ac. Barzig a zo en gwerzh e Roazhon, 24, avenue du Cimetiére, K.R.P. 1025 85, ROAZHON.

BUHEZ AR SKOL VREZHONEK,

gant an Itron Galbrun.

Digoret eo bet ganin ar c'helenn dre ar Brezhoneg, e Skol Sant-Erwan, d'ar 4 a viz du 1957.

Degouezhet e oan un devezh a-raok ehan-skol Gouel an Hollsent ha tu an boa bet, evel-se, d'ober anaoudegezh, buan a-walc'h, gant ar skolidi hag al lec'h. Amzer an boa bet, e-pad an devezhioù dilabour, da zegemer allioù an ac. Kalvez a-zivout an do-veol ma c'hoantae dezhañ a vefe graet gante evit ar galannadurezh nevez-se. Savet e voe diouzhtu un daolenn-labour dre amzervezhioù ha dre zanvezioù. D'ar sul 3 a viz du e oan gant Renner ar Skol o tegemer ar vugale o tont en-dro, ambrouget gant o c'herent.

ORIN AR VUGALE. Savet roll va skolidi e oa 21 anezho, hag ez eus bepred.

Eus Ploueg-Ar-Mor.....	7
Kemper-Gwezenneg.....	3
Ploue'ha.....	1
Dinan.....	2
Kemper-Kaourintin.....	1
Molan.....	3
Roazhon.....	1
Bro-Bariz.....	3

(1)

AN AMZER GOUESTLET. An holl vugale-se a heuilh kentelioù all, dre ar Galleg, gant ar baotred all. Evel ma'z eus daou glas er skol, eo bet ret rannañ skolidi ar Skol Vrezhonek e daou rummad: AR RE VRAS, etre 12 ha 9 bloaz, hag AR RE VIHAN, etre 9 ha 6 vloaz; ha kemer pep rummad, e-pad marevezhioù diskeñvel. Evel-se eo ret kaout a-gevret pater ha h'ouzont koulz lavarout ger brezhoneg ebet (ne vez marse komzet brezhoneg dezho gant o zud hag int o chom e Breizh...) hag ar re all, ampart a-walc'h.

(1) Lavarout a ran ez eus c'hoazh 21 skoliad war ar roll. Gwir eo, rak ma'z eus 2 e-touez ar re gentañ enskrivet hag o deus kuitaet, daou all a zo deuet. Unan eus ar re o deus dilezet a zo bremañ er skol en ur barrez all. Egile, evit ober plijadur d'un dintin gozh, ne heuilh ken ar skol vrezhonek. Un dra blijus da lavarout koulskoude: kenderc'hel a ra ar paotrig da zont war hon tro, roet eo bet dezhañ an notenoù douaroniezh ha levri Istor Breizh. Graet en deus bet kenstrivadeg miz c'hwevrer ha gounezet en deus ur plas mat. Ar paotr-se ivez a zo e-touez ar re o deus amprestet ar muiañ a levrioù-lenenn eus al levradoeg e-pad miz c'hwevrer.

(Marzet em eus bet allies e oa ar re gozh hag ar re zizek e-touez brasañ enebourien ar yezh. Notenn la-kaet gant A. Ar C'halvez.)

Tu an eus kavet, bremañ, da renkañ tamm pe damm an diaester-se. Gwellet e vo penaos dre sellout ouzh an daolenn dre amzervezhioù a zo anañ war-lerc'h:

Taolenn dre amzervezhioù. (Devezhioù hag Enrvezhioù.)

- 9 e - 9 30 AR RE VIHAN. Katelkiz, Yezh:lenn. } lun, meurzh, merc'her, gwener, sadorn.
- 11 e - 11 e. AR RE VRAS Yezh ha Danvez all hervez an deiz. } gwener, sadorn.
- 13 e - 14 e AR RE VIHAN, holl re ar skol, Kan, e Galleg, ha dreist-holl e Brezh. } meurzh.
- AR RE VRAS, holl re ar skol, Kan, e Brezh, hepken. } gwener.
- AVIEL, skol vrezho. } merc'her, sad.
- 16 e - 17 e. HOLL SKOLIDI AR SKOL VREZHONEK, labourioù-dorn: tresañ, pegañ skeudenoù, kempenn c'hoarielloù h.a. } sadorn.
- 17 e - 18 e .AR MERC'HER, div anezho a vez roet dezho, bemdeiz, an hevelap kentelioù ha re ar baotred vras diouzh ar beure. (1)

Taolenn dre an darvezioù Keleñnet, d'ar re a heuilh kentelioù 11 eur hag 17 eur.

LUN.	YEZH: 20 mn, yezhadur. 40 , skrivadenn.
MEURZH	YEZH: 30 mn, goulennoù ha reizhadurioù d.w.b. skrivadenn al lun. DOUARONIEZH: 30 mn.
MERC'HER.	YEZH. 30 mn, lennadenn displeget ha studiet. JEDERIEZH: 30 mn, reolennoù a jedoniezh, kudennoù kontañ dr gomz. AVIEL 30 mn, etre 13 e 30 ha 14 e.
GWENER	YEZH 30 mn, pennad lennet ha studiet. ISTOR 30 mn.
SADORN	YEZH 30 mn, displegadennoù dre navor. SKLIANTOU, 30 mn, korf an den, kentelioù traoù. (2) LABOURIOU-DORN, 50 mn, etre 16 e ha 17 e. AVIEL, 30 mn, etre 13 30 ha 14.

(1) Daou baotrig 8 vloaz a chom bremañ da heuliañ ar gentel roet d'ar merc'had da 17 eur, e-lec'h dont diouzh ar beure da 9 e. Ar gentel-se a zeu da vezañ hini ar rumad ampartañ hep na vefe sellet ouzh oad ar vugale. Neuze e vezont lakaet da labourat un tammig donoc'h eget ar re all pe wir ez int kalz barrekoec'h daompren an diskleriadurioù e Brezhoneg. Da 11 e, e vez ret mat din, a-wechoù, mont dre ar Galleg pa welan darn ha ne gomprenont ket.
(2) Krog e vezer gant al levrig "Korf an Den": un diverrañ dioutañ, evel just.

Evel-se e-pad 7 eurvezh kelenn e-doug ar sizhun e roer:

war-dro 3 eur d'ar yezh,
30 mn d'an istor,
30 mn d'an douaroniezh,
30 mn d'ar jedoniezh,
30 mn d'ar c'hentelioù traoù pe skiantoù,
60 mn d'an Aviel,
60 mn d'al labourioù-dorn.

Ke verr an amzer, anat eo. Ret mat eo dimp klzsk tennañ dioutañ ar muiañ ar gwellañ.

AR BANSIONIDI. Ret eo sellout ouzh diskibien ar skol dre ar Brezhoneg en un doare all c'hoazh: hervez ma'z int diavaezidi pe banisionidi.

Evit ar gentañ ne gegeront rik nemet pezh a vez keleñnet dezho e-pad an eurvezhioù divizet, hervez an daolenn. Adalek n'o devez kuitast ar skol, ret mat eo sonjal, ne reont ket nemer gant ar Brezhoneg, nemet unan anezho hag a daol e dud evezh bras war gemant-se.

Ur banisionidi eo dishevel-tre evito dre eurvad. Adalek ma tibanont diouzh ar beure betek ma vanont kousket diouzh an noz, e klevont Brezhoneg en-dro dezho. Kerent hag echu an eurvezhioù skol dre ar Galleg e vezont lakaet da glevout ha da gomz Brezhoneg. Er porzh-skol avat, e-pad an diduadennoù, e vezont lezet dieub; aze, ret mat eo anzav, ar Galleg so a drec'h.

Ur gelenmadurezh kaset betek he stumm sevenadurel ha desavadurel gwirion eo eta an hini a vez roet d'ar banisionidi. Alist, keleñnet, henchet, gourdroutet, goure'hemennet pe kastizet e vezont dre ar BREZHONEG, en abeg da gemant tra a droen a-hed an devezh. Kemant-se a die merkañ o spred; kemant-se a lasker da vihanañ. Goude 4 niz arnod, anat eo, tamm pe damm, al levezon-se. Anat eo e kompren an holl, ha buan a-walc'h, pezh a c'hoantaer reñf dezho da intent. Alies ez eilgeriont dre ar Galleg, nemet daou pe dri, brezhonegerien douet dija. Muioec'h-mat e touganiz bremañ brasennoù war o hed e Brezhoneg. N'eus iorzh penaos ar menoz a no ast betek o emskiant, gwisket gant gerioù brezhonek. Ur roud bennak a chomo. Da hini eo a vefe, evit al lod-nn vrasañ eus ar vugale-se, unan don a-walc'h da dalvezout evit o buhez-pad.... O doareoù-ober a gomm ivez tamm-ha-tamm: evel pa vefe diwahet enne un elfenn a lorc'h, e vezont kalz evezhiekoc'h eget an daizioù kentañ. Teurel a reont plad muioec'h war o emzalc'h dre vras: gwiskamantoù naet - arabat goulen re ! - o zraoù-skol diwallet ha klenket bravoc'h; o emzalc'h pa vezont o traou-zif ar bourg, war an hentoù, en o c'hoarioù. Bugale int, ha bugale e chomont, koulskoude e seblant e tiwanfa ar poell nevez dezho.

D'ar gerent da lav. rout din, goude vakasoù-Pask da skouer, ma fazian.

AN DANVEZIOU KELENNET. Emaint meneget war ar roll a-ratozh. Ur gerig bennak ouzhpenn a dalvezo da ziskleriañ penaos e reer ganto.

Yezh. Deskiñ gerioù nevez, deskiñ distagañ ervat, deskiñ gvel frazennoù, deskiñ reolennoù-diazez ar c'hramadeg (gant ar enkad gerioù a-ratozh), hag ar skritur.

Evel implij d'ar yezh hon eus gwelet pezh a vez graet gant ar bañsionidi. Evit ar re all ez eo strishoc'h, evel just. Klask a ran kompeziñ an diforc'h dre c'houlennata muioc'h ar re zimpartañ e-pad ar gentel.

Douaroniezh. Krog omp gant an douaroniezh dre vras: an Douar er Bed Hollek, degouezhet omp bremañ gant an Douaron-Bras, Europa, Azia h.a... Abaoe miz c'hwervrer e vez bep eil tro pennadoù diwar-benn douaroniezh Vreizh.

Ret eo bet din sevel notennoù liesskrivet diwar levr an Ao. Poisson, a zo e Galleg, ha niverenn III "SKOL", "Douaroniezh Vreizh" (1), a zo ennañ d'nevez re uhel evit hor skolidi.

Gant lod an douaroniezh dre vras ez adwel ar vugale dre ar Brezhoneg traoù a ouzont dija. Gant lodenn Vreizh, avat, e teskont traoù nevez. Darn, koulskoude, bet er skol gant an Ao. Kalvez e-doug ar bloavezhioù tremenet, a c'houvez endeo kalz.

Istor. Gant levrig an Ao. Poisson, troet gant Gournadec'h, e ran. Nemet, ur wech ar mare, e roan, dre gomz, diskleriadurioù ouzhpenn tennet eus levr bras an Ao. Poisson.

Jedoniezh. Levrig "Niveri ha konta" kelennerien "OBER" am eus bet ar chañs da gaout a-drugarez da F. Kervella. (2) Un diazez aes da implij a zo aze. Kirout a reomp an doare kozh da lavarout 70, dek-ha tri-ugent, h.a. Krog omp, ur pennadig' zo, d'ober jedadennoù ha da zirouestlañ kudennoù gant div pe deir jedadenn. Elijout a ra d'ar vugale ha desket o deus aes a-walc'h ar gerioù: niveriñ, pegementiñ, stroliañ, diskontañ, liesskementiñ, rannañ, mont a reont gorrekoc'h evit pezh a sell distagañ un niver pa vez ennañ milionoù, daoust m'o deus, dre vras, komprenet an doare d'en em gemer.

An displegañ. Klasket ez eus bet lakaat ar skolidi da zeskiñ pennadoù dre envor. Aze, avat, n'eo ket denet an taol da vat. N'o deus ket amzer a-walc'h gant ar c'hentelioù gallek dezvez da zeskiñ a-hend-all, pe n'int ket donezonet war ar prezeg? anezho o daou, moarvat. Unan hepken a zo deuet a-benn da zeskiñ ha da displegañ brav-tre ar pennad "Nedeleg Breizh" (3) ken o deus ar re all stlaket o daouarn dezhañ, drezo o-unan, ouzh e glevout. Lakaet e vezont, bep eil, da lenn ha da adlenn pennadoù; setu holl ar pezh a zo bet graet abaoe. Ar bañsionidi a vez lakaet, pep hini d'e dro, da lavarout ar bater d'an noz. Desket e vez dezho evel-se distagañ ervat: distagañ pep ger, gant ehanoù etre pep frazenn. Ur gounid anat a zo evit se gant daou hag a c'hraoguilhe kalzik a-walc'h er penn kentañ. Adkregiñ a vezo graet gant displegadennoù berroc'h.

(1)gt A. Guilcher. (2) Moulerez Kreiz-Kêr, Roazhon. (3) A. Ar Bras.

Ar C'han. amañ avat emañ an trec'h... Lavaret em eus e tesker kanaouennoù brezhonek d'holl vugale ar skol. Kement-se a zo a orin, koulskoude, e Skol Sant-Erwan Ploueg-Ar-Var. Kement-se a zo kiriek, moarvat, d'ar skolidi bezañ ken troet ha ken akwit war an dachenn-se. Un dudi eo o c'hlevout a-greiz-holl, goude merenn da skour, ha krog evite an amzer diduñ, o kanañ a-bouez-penn "Yannig ar Mil Icher", pe, nevez' zo, "Ar C'hazh-Koad"... evel-se, dre envor, pen-da-benn... ha gant un doare brav da reiñ "ton" d'an danvez...

Ar Skrivañ. Ar skrivadennoù a zo prizet mat - ya, evel-se emañ - gant hor skolidi, ha dont a reont, tamm-ha-tamm, da zistankañ kaer o faziou. Un dra da verzont: darn, hag'gomz gant poan, a skriv mat ha gant nebeut-tre a faziou.

N'omp ket krog c'hoazh da lakaat ar vugale da sevel pennadoù drezo o-unan. Pezh a reont avat eo pennadoù lizheroù a gasont d'o c'herent. A-ratozh, ne zifazied ket o skridoù er penn kentañ. Bremañ ez adweler a skrid gante, en ur lakaat anezho da zizoleiñ o faziou.

War dachenn al lizhiri-se (hepred etre bañsionidi, anat eo) ez eus savet evel un doare halebini, ar re vihanañ, nannvrezhonegerien pa oan degouezhet e Ploueg, o-c'h en em lakaat da sevel ur frazenn pe ziv, brav a-walc'h. Ur patrig eus un tiegezh diwar ar maez a zo krog daou viz'zo da skrivañ d'ar gêr e Brezhoneg; laouen eo bet e dud ha lod'h a vez enne. Abaoe ur pennad eo krog ar paotr-se d'amprestañ levrioù brezhonek: unan, daou, bep sizhun....

Al Levraoueg. Renket ha kompennet eo bet gant skoazell Alan Al Louarn, goude vakañsoù Deiz Kentañ ar Bloaz. Abaoe hant ar miz genver eo krog ar vugale da c'houlenn levrioù a lemont o-unan. Bez' hon eus evel-se da reiñ dezho an holl levrioù nevez embannet evit ar vugale. Ar re ampartañ a zo krog gant levrioù fonnisoc'h evel "Alanig An Tri Rode".

E-pad an amzer-vak goude koan e vez c'hoarioù eveshaet evit ar bañsionidi. E-doug ar vailhadegoù-se e vez lennet a-vouez uhel pennadoù eus ul levr. Ret eo an-zav e skuizh buan ar selaouerien, an sur ne da ket dezho evit ur seurt striv, moarvat.

Skiantoù natur. Seurt kentelioù a vez benneiz tro d'ober diwar-benn tra pe dra. Betek-hen n'em eus ket krog gant ar ragaozet a-ratozh hag a zo bet kaset da "SKOL" gant hor c'hanvroad Heusañ. Emaon o vont d'implij darn anezho, e-pad an amzer gouestlet d'ar skiantoù, bep eil sadorn, adalek miz neurzh. Kredañ a ran ez eo barrek a-walc'h an diskibien, bremañ, da zegemer gant frouezh, seurt kentelioù. Lavaret em eus e reomp dija gant "Korfi An Oan". (1)

(1) gant Pêr Denez, e ti "Skridoù Breizh". Disul diwezhañ (2/3/58)

em boa kaset ar bañsionidi da vale betek ur c'hoad pin. Ur paotr a anaoudegezh a ambrougac'hanomp a-dreuz d'ar d'head, dre hentoù brav, o tremen e-riehen menleuzioù kozh, pe a-us da draoniennoù doh ha gwezmek. Mo e oa tu da sellout ouzh an natur, evel-se. Neus ar goañv war bep tra, emañ koulskoude an holl blant evel o tivoreidiñ. Skañvoc'h an aer, e vlaugn torkadoù lann ha

Religion. Ur skol gristen eo Skol Sant-Erwan ha lec'h a vez roet er studiom, evel m'eo dereat, da zesavadurezh spered hag ene ar vugale: ar pateroù lavaret gant akad bras, ur gerig berr a-raok da dennañ an evezh war an oberenn santelaat m'eo ar bedenn. Abegoù all a vez kavet, e pep degouezh, da zigeriñ o spered war du speredel ar vuhez. Evit ar pedennoù d'an noz, evel m' eus meneget dija, pep hini d'e dro a lavar al lodenn gentañ, digeriñ gant ar re all. Schuñ a reer gant ur werzhen ganet, troidigezh Maodez Glanndour eus an "In manus tuas, Domine": "Stre ho taouarn sakr e lakan va spered, aotrou", gant un ton evit amzer ar binijenn, hag unan all gant "alleluia" evit an amzerioù all.

Klasket e vez ivez, da skouer c'hoazh, reiñ d'ar c'hastizoù o zalvoudegezh: ar fall a dle degas e zic'haou; degemerou dre gaer ar c'hastizoù dle bezañ ur gounid evit emskiant an den, ha tamm ebet un abeg a gasoni, pe a zroukrañs.

An Aviel a vez lennet ha displeget pennadoù anezhañ bep merc'her ha bep sadorn. Rediet e vez ar baotred, e-keit-se, da gemer evit selaou, un dalc'h dereat: difiñv, sonn, o brec'hioù kroaziet. Met eo lavarout e sentont gant kalz a youll vat hag e seblant plijout dezho kaer an hanter-urvezhioù-se. Un "A" a zesped a laosk-jont, en deiz all, pa oa kemennet dezho e oa daleet, evit ar wech se, lennadenn an Aviel.

HOR PAL. Kelenn ha desevel bugale dre ar Brezhoneg hag hen ober gant doareoù diazezet ar muiañ posubl war AR VUHEZ, dre o lakaat da brederiañ ha da zastum skiant-prenet drezo o-unan. Henchet, aliet, levezonet kentoc'h eget embreget evel dre ret. Klasket e vez enaouliñ en o spered un elfenn a varrelevenez hag a lorc'h a-zivout ar pezh a vezont lakaat d'ober, entanañ o feiz en amzer-da-zont; dezho avat da strivañ dibaoez evit ma vezo "Gwelloc'h stav". (1)

EMZALC'H AN DUD DRE VRAS E-KEÑVER ARSKOL. Aze e ranker kas gourc'hemennoù d'an hini a savas Skol Sant-Erwan, hag a cuezas diazeziñ an oberenn-se er Vro, ket evel un dra "ispisial" hag iskis, tamm pe damm, met evel un dra naturel. Evel-se ez eo degemeret gant an holl. Darn a zo diseblant (ret mat eo anzav emañ ar Brezhoneg war goll e pastelloù-bro tost d'ar nor evel Ploueg, dreist-holl gant ar vugale); ne seblantont ket bezañ a-ensp. Darn ivez a ziskouez o souezh hag o flijadur ouzh hon c'hlevout, dre zegouezh, o vrezhonegañ. En tiez-kenwerzh e-lec'h ma'z omp anavezet a-walc'h bremañ e kever tro da sevel kaoz ganin diwar-benn hon yezh. Da gentañ e komzer Galleg, ha tamm-ha-tamm e troer war ar Brezhoneg.

ha war ar skourroù emañ ar hisigoù o tistoubennañ. Troc'het ez eus bet dioute gant ar baotred, ha dastumet touskan eus ur seurt divoutin na gaver nemet e lec'hioù digenvez ha brouskoadek.

Peadra a oa aze da sevel, evit an deiz war-lerc'h, danvez ur skrivadenn en ur sellout adarre ouzh an traoù degaset ganimp eus hor baleadenn.

(1) Ar ger-stur-se a zo bet degemeret gante abaoe deiz gouel Itron Varia Lourdes, an 11 a viz c'hwevrer.

HOR DIAESTRIOÙ -HON REZH-MOU. Arabat e vefe sevel ur skrid meulgan, avat, rak ret eo ivez sellout ouzh tu fall an traoù.

Da glemm a vefe, hel lavaret em eus dija, diouzh an amzer re-veur a c'heller gouestlañ d'ar c'hentelioù dre ar Brezhoneg. Digkeriet em eus penaos ne oa ket tu, evit, ar bloaz, ha dreist-holl e-pad ar mizvezhioù da zont a zo marevezh an arnodennoù gallek, d'ober a-hend-all.

An diaester all a zeu a-berz ar vugale o-unan, re zishevlel an eil diouzh egile dre o oad hag o anacudegezh eus ar yezh, ha ret eo koulskoude oc'hemer war-un-dro.

Ur skoilh eo ivez santout o deus desket holl pezh a ouzont DRE AR GALLEG, zoken an 3 pe 4 a zo bet desavet da gentañ-holl e Brezhoneg, ha ne roer dezho nemet un adstum eus tra-mañ-tra: prest int da genveriañ, ha n'eo ket da lavarout e vefe en o spered an trec'h gant ar Brezhoneg... Ur striv a-ratozh a rankont ober, anat eo, evit diarbenn ar Galleg hag implij ar Brezhoneg.

Evit an abegoù-se ez eo ret-mat astornat, diwall da skuizhañ ar vugale pe d'o digalonekaat. Ar c'hentelioù, dre-se, n'hellont ket bezañ kaset en un doare resis ha strizh evel ma c'hell ober ur c'helenner bennak en ur gemer ul levr aozet a-ratozh evit pezh a fell dezhañ reiñ da zeskiñ d'e skolidi. Diouer a ra dimp, a-hend-all, seurt levrioù, savet war eñn e Brezhoneg evit an Douaroniezh, ar skiantoù h.a...

Trugarez d'ar re o deus kaset, ha d'ar re a gaso dimp, pennadoù prest da vezañ implijet.

BRUDEREZH. Kent echuiñ e kavan mat ivez trugarekaat an holl re o deus diskouezet fiziañs e-keñver hon oberenn ha a gendalc'h d'he skoazellañ e stumm pe stumm. Kalonekaus eo klevout, evel m'eo degouezhet din hen ober, tud o komz eus amzer-da-zont hor Skol, ha ul lavarout e vo kaset dimp ar bloaz a zeu bagel-mañ-bugel eus tiagezh-mañ-tiegezh, hag en ur glask pere c'hoazh a c'hellfe dont.

Ar bruderezh a-bal-forzh, evel ma vez graet peurliesañ en amzer-vremañ, ne zerefe ket ouzh hor strivoù: an nerzh a sav diwar al labour kaset deiz-ha-deiz, gwellañ ma vez gallet, ma teu da entanañ kalonoù muioù-mui a dud a youll vat, eo an dra bouezusañ.

I. Galbrun.

da vezañ embannet e miz mezheven:

"NEBLEG EN BREIZH" ha DAOU REZH-C'HOARI,
gant JARL PRIEL.

war ar stern:

un dastumad displega-dennoù-skol,
ul levr Brezhoneg evit ar skolioù gentañ,
gant ARMAÑS AR C'HALVEZ.

TESTENIOU

UN DASTUMAD LIZHIRI.

Ur doare skol Vrezhonek gortozet gant kerent.

"Netra n'en defe gallet ober muioc'h a blijadur din eget ho lizher hiziv. Mont a rin disul 12 a vezheven". (P.D.20/5/55)

"Ho lizher en deus graet kalz a blijadur din -evel just ez in d'ho podadegoù - spi am eus e teuet a-benn da sevel ar Skol Sant-Brenda breizhat, va hetoù kalonekañ a zo ganeoc'h." (K.4/5/55)

"Setu moarvat an darvoud pouezusañ a vefe degouezhet abaoe bloavezhioù evit pezh a sell ar Brezhoneg, un dra dispar ha dic'hortoz eo ha ret e teufe an taol da vat. N'ouzo ket penaos out deuet a-benn, met kas a ran dit va gourc'hemennou." (R.R.21/5/55)

"Ur skol evel an hini emaoe'h e soñj sevel a vefe eus ar c'hentañ evit bugale evel va re." (Y.D.8/5/55)

"Me a zo a-du ganeoc'h evit sevel ur gevredigezh familhoù, met re hell emañ evit reiñ deoc'h alioù. Ma c'hellit sevel ho klas e c'hellit kas deoc'h arc'hant..." (J.R.8/5/55)

"Plijet dreist on bet o c'houzout dre ar c'helc'hlizher hoc'h eus kaset din ez oc'h bet aotreet gant eskopti St-Brieg da sevel ur skol vrezhonek en ho parrez. Ur c'hammed a-rack war da-chenn al labour resisshag e fedus eo an aotreadur-se. Hep mar na marteze e ray berzh ar skol-se, anat eo din pa anavezan ar feiz hag a-r gred a zo ennoc'h. Ma vefe kemend-all a feiz hag a c'hred e beleien all Breizh-Izel e vefe kemmet kalz a draoù evit brasañ mat Breizh hag an Iliz Katolik.

Hogen gant gourc'hemennou ne zeuer ket a -benn da ziazezañ un oberenn ken alvoudus hag hoc'h hini. Setu ma c'hellan lavarout deoc'h e kasin deoc'h va skoazell kerent ha ma vo bet divizet mat pep tra a-zivout ar skol." (Y.B.I3/5/55.)

"J'avais déjà connu votre louable intention de créer une école bretonne... Depuis j'ai entendu parler de vous par des camarades qui vous connaissent et m'ont encouragé à vous écrire. Cette future école bretonne est une des réalisations qui s'imposeraient le plus en Bretagne. Vous serait-il possible de me fournir quelques indications quant aux prix et conditions de pension... Acceptez-vous des filles ? Je n'ai d'ailleurs que des filles, dont deux... pourraient le cas échéant être élèves." (E.H.2/9/55)

"Je lis ce jour dans le journal "Ar Vro" que vous ouvrez une école bretonne. Ayant deux garçons, l'un de ... et l'autre de... j'aimerais connaître le programme de votre école, du moins pour le second. Les enfants ne savent pas le Breton que je connais pour l'avoir appris comme "une langue étrangère". J'ose compter sur une réponse avec toutes les précisions utiles." (L.A.5/12/55)

"N'ayant pu moi-même bénéficier d'une éducation telle que celle que vous donnez, je ferai tout mon possible pour que mes enfants puissent recevoir un enseignement valable, donné par des gens de leur nation, ne méprisant pas leur forme de culture!" (A.Y.10, Madagascar, 9/12/57.)

Talvoudigezh an Oberenn.

"Krediñ a ran penaos ma teu ho taol da benn ganeoc'h ho pezo graet ul labour talvoudus-kenaf, n'eo ket hepken evit skol Sant-Erwan, met zoken evit Breizh a-bezh. Talvezout a ra ober an taol-esa-mañ, a gredan. Den gwelloc'h egedoc'h n'hellit bezañ dibabet ul labour a-bouez bras evel hemañ, rak den n'anavez ar gudenn gwelloc'h egedoc'h. Ma vezoc'h harpet gant an holl Vreizhiz kalonek." (G.T.4/5/55.)

"Da vennad, brasañ hini a zo bremañ marteze en hon emsav brezhonek, a zo un nevezinti a ray kalz a vrud ha spi am eus enor dit ha d'r gelennadurezh kristen. Sabatuet e chom an holl!" (P.D.6/6/55.)

"Meizout a ran pegen pouezus eo an oberenn emaoe'h o vont da gregiñ ganti, ha pediñ a ran evit ma vo diskoulmet ar c'hudennoù ha ma c'hellio al labour mont war-rack. Silvidigezh ur bobl a zo etre ho taouarn. Kerent ha loc'het ar gevredigezh, emañ prest da reiñ ur gweneg bennak." (M.C.7.6.55)

"Met ul levenez veur a garg va c'halon oc'h anavezout ar me-noz diwanet en ho sperec hag a vezo sevenet hep dale. Mil meuleudi deoc'h da vezañ ken taer, ha ken araoger." (Y.T.3/5/55)

"Un dra a-bouez eo kroudigezh ho skol-henchañ. Re vezo un trec'h hag ur skouer evit Breizh a-bezh!" (F.C.10/5/55)

"Ar gudenn nemeti eo kaout bugale. Setu holl... Ha pa vije nemet daou pe dri, mont dezhi hepred... Goharriet mat ez eo an traoù. Doue da vezañ meulet!" (M.K.15/6/55)

"Un dra pouezus neurbet emaoe'h oc'h ober. Hast am eus da anaout pezh a vo divizet." (P.L.4/5/55.)

"Ma'z eus tu d'ober ur skol diyezhek: mont dezhi hep chom da goll amzer! ha pa vije 10 bugel hepken da gregiñ e vo kement-se atav!"

Ouzhpenn n'eo ket ret ober pep tra e brezhoneg adalek ar penn kentañ. Na pa vije kelennet e Brezhoneg nemet 2 eur bep sizhun da gregiñ, ne vije ket fall dijs, tamm ebet. Ma ne vije ket tu da gelenn un darvez penn-da-benn e brezhoneg, ar penn kentañ: neuze ober ar pezh a vije aes da ober, da c'hortoz ober gwelloc'h! ... Ne fell ket din pouezañ warnout, met anzav a ran emañ a-du krenn gant an Ao..B... Ma vijen 'profad' e lavarfen dit dre sur, petore hent eo da hini. Met allaz! Plijet gant an Aotrou Doue skuilhañ e sklerijenn ez kreiz hag a nerzh, ma c'hellit bezañ salver (unan da vianañ eus Salverien) hor bro." (M.K.16.5.55)

"Komzet am eus da veur a gloareg eus ar pezh am boa gwelet ha klevet pa oan bet e Skol Sant-Erwan, bremañ 'z eus ur miz. Kompen mat a reont ar gudenn, met holl a lavaront: Ya, met den ne grado ober kement-se, ha n'eo ket ma a grogfe gant al labour. N'on ket anpart a-walc'h evit sei!" (J.R.25/5/55)

"Ar bloaz a neu... e rin eus va gwellañ evit kas deoc'h ur skodenn vrasoc'h, rak hoc'h oberenn a zo an hini dalvoudusañ marteze e-touez an oberannoù breizhek, peogwir e toug an emzerc'h-daoz Salz ma vo ar greizenn gentañ eus ur rouedad skolioù par d'ar skolioù kembraek." (P.P.16/8/57)

" N'on ket ali ganeoc'h war gudenn bouezus an doare-skrivañ, met ali on ganeoc'h diwar-benn ar pal pouezusoc'h a stourmit evitañ:lakaat ar brezhoneg evel yezh ar gelennadurezh e skolioù Breizh-Izel an dra-se hepken i e vizo da vont da get." (J.P.D.27/1/58)

"Votre taol-eñ", tel que le détaillé votre feuille explicative, devrait être suivi par toutes nos écoles chrétiennes du pays bretonnant...Je sais que les programmes sont très chargés et que le personnel enseignant est toujours insuffisant et dès lors débordé de travail (j'en sais quelque chose puisque je fais moi-même classe à l'école des garçons dedepuis plusieurs années) mais s'il est difficile de casser une demi-heure de breton chaque jour, au moins pourrait-on lui consacrer une heure et demie ou deux heures par semaine!(Y.C.A.eost 55)

"Votre œuvre et votre entreprise méritent plein succès et je suis persuadé que votre école-pilote donnera les résultats que nous en attendons tous et ouvrira la voie à d'autres réalisations."(27/5/56,Y.F.)

Diaezamentoù.

"A-enep d'un dra en ho raktres e savan avat:arabat eo deskiñ d'ar vugale vihan div pe deir yezh;ar brezhoneg hepken e-pad an daou vloavezh kentañ.Evel kelennar hag evel breizhad e komzant:mont a rafec'h en ar-benn d'ur c'hwitadenn!"(P.D.20/5/55)

"Un dra diaes eo sevel ur skol evel ma fell deoc'h ober.Hag evel ma lavarit,ar skollh brasañ a vo dizemglev ar vrezhonegerien.Kalz a skiant vat a vo ret a-berzh an holl,hep re a strizhder-spered diouzh un tu hag egile.

1) Krediñ a ran e t-le an doare-skrivañ peurunvan talvezout da ziaze e kelennerezh ar yezh skrivet.Ar vugale a dle gouzout evelato ez eus doareoù all,ha bezañ gouest da lenn ne vern pe skrid (ken nebeut a levrioù brezhonek a zo !)

2) Ar pezh a zo a-bouez eo da gentañ boazañ ar vugale da gomz brezhoneg,dreist-holl kemer ar pleg da gomz brezhoneg etrezo.

3) Kompren a ran,a gredan,perak e kinniger deskiñ saozneg. D'am soñj,avat,teir yezh a zo re evit bugale vihan.

4) A-du e vefen gant D.pa gomz evel kelennar,ha muioc'h c'hoazh pa gomz evel broadelour:gwel e vefe ober gant ar brezhoneg hepken e-pad an daou vloavezh kentañ.Koulskoude, anat eo e rankomp evit ar mare kemer an traoù evel m'emañt. Spi an eus e teulo ar menoz da vad" (M.H.6/5/55)

"Ma vije bet ho skol e-kichen Gwenamp, da skouer,pe en ur vro ma vez c'hoazh gouezet brezhoneg gant ar vugale,e vije het kalz aesoc'h a gredan sevel ur seurt klas da implij ar brezhoneg evel benveg kenteliañ.Kavet ho piñe aesoc'h bugale da zaremprediñ ar c'hlas-se.Ha marteze en o zonez bugale he ne vefent ket bugale broadelourien rik ha taer.Gwelloc'h e vefe bet evit dazont ar skol.(G.A.26/5/55)

"C'hwi a car ivez n'on ket a-du evit kemer pafisionidi ken yaouank.Hervezon n'eo ket e-giz-se ez eo ret bouc'hañ gant al labour met en ur skol war-ar-maez,kalz a vrezhonegerien tro-dro,pe en ur gêr:Kemper kentoc'h,e-lec'h ma vefe tud an Emsav war al lec'h ha nann parsionidi.(K.R.s.d.)

An Danevell-mañ a zo gortozet...

"Gortoz a reomp holl gant mall da gelaouenn,dimp da gaout un toullad keleier diwar-benn ar c'hlas nevez..Gras deoc'h ho tesou,hag a zo krog e divrec'h an alar,da gerdere'hel hep fall-galonif betek penn an erv !"(P.M.5/1/58)

"C'hoant am befe da c'houzout hiroc'h diwar-benn kelennadurezh ar Brezhoneg,dreist-holl diwar-benn ho skol.Mar gellfec'h kas din un nebeut doareoù,dreist-holl diwar-benn ar skoliata hag ho menozioù evit an amzer-da-zont,e vefen anaoudek bras en ho keñver....Hetif a ran deoc'h ober berzh gant ho klas-henchañ." (T.F.Harlingen,Fryslân,Izelvroioù;27/8/57)

"L'ASSEMBLEE GENERALE du CERCLE CEBTIC 'JABADA' réunie à Paris le 28 novembre 1957,après avoir entendu la lecture des rapports de son Bureau au sujet de la langue bretonne:

..... -CHARGE son bureau de l'informer des résultats obtenus par la Classe de SKOL SANT-ERWAN à PLOUEZEC.

CENTRE D'INFORMATION "Foi et Bretagne", 23,rue Etienne Marcel, PARIS.

Le jeudi 23 février,

"LE COMBAT POUR LA LANGUE BRETONNE,UNE REALISATION : L'ECOLE DE PLOUEZEC par Alan Al Louarn.

ROLL AR PROFOU HAG AR SKODENNOC.

- Abad Auffret,1 000 lur;E.Barzic,500;Y.A.Beg,10 000;P.Ar Bihan,1 000;Bleuñ-Brug Treger,50 000;L.Bothorel,30 000;
- J.P.Bouché,2 000;E.Le Carrer,1 000;P.Le Calvez,1 000;Mad Y. Chapel,1 000;Ta d Chardonnet,500;Dill Chevillotte,1 000;Y. Cormerais,3 000;Abad Klerg,1 000;Daniël,1 000;H.Delaporte,1 000;Kerlann,1 000;Entente Culturelle,Brest) 100 000;Dr Eti- enne,5 000;Even François,2 000;Dr Ezel,5 000;L.Ar Floc'h, 1 000;Y.Fouere,1 000;Y.Ar Gow,7 000;Dr Grall,7 000;Guégen, 4 000; Dr Guillou,1 000; M.du Halgouet,1 000; H.Herry,1 500; Heussaff,1 500; R.Huon,1 000;P.Kervella, 10 000;Langleiz, 2 000;P.Laurent,10 000;Malard Y.1 000;I.Martin, 1 000;I.Ar Mee,1 000;G.Ar Menn,300;G.Le Meur,1 000;R.Moride,Kanada, 10 000;P.Le Moine,5 000;P.Monjarret,1 000;J.Norvan,10 000; Nicol,5 000; A.Noury,5 000;A.Ollivier,1 000;Y.Pannerer,1 000; Perneq,Tunizia,1 000;C.Perez,2000;Abad Poulichez,500;A.Renault, 1 000;Abad Robert,1 000;Ktez de Rohan,40 000;P.Roy,1 000;De Sagazan,1 000;It.Sant-Pêr,10 000; Abad Ar Sant,1 000;G.Tanguy, 1 000;P.Ters,20 000;Y.Thomas,1 000.(betek ar 15 a vis maure 58)

HOL LABOUR BARNET ...

gant KERENT hor SKOLIDI

Laouen bras on bet o kas T....ha M... da Skol Sant-Erwan ha da welout pegen mat e vint du-se e pep kenver.Koulz evit ar bevañs,al lojañ hag ar c'helenn.....

Gant plijadur am eus lennet lizher kentañ H... e brezhoneg. Ma teufe ar gomz gantañ ken brav hag e lizher ne vefe ket fall....

Gwelout a reomp ne goll ket ar vugale o amzer e Ploueg,hag an doare d'ober gant taolennou bihan gant ar vugale war o c'haierou a seblant bezañ plijus .Ne fell ket dezhañ evit priz ebet addistreiñ d'ar skol amañ.Meuleudi a ro da Bloueg forzh pegement !

Bremaik e oa o c'hoari skol gant e c'hoar,efi a oa ar c'helenn,anat eo...



KUDENN AN ARCHANT .

Hor skol vrezhonek a vev diwar aluzonou ar vretoned.Ezhomm hon eus war-dro 450 000 lur evit pacañ ar gelennerz ha prenañ al levrioù-skol brezhonek.50 000 lur a vefe d'ober c'hoazh ouzhpenn evit sikour ur familh niverus bennak da baeañ pañsion o faotred.Dastumet hon eus endev 417 000 lur a-drugarez d'ur skoazell a-bouez,kant mil lur,votet d'hor c'hevredigezh gant Bodadeg Veur "Emgleo Breiz".("Fondation Culturelle Bretonne".)


Bez' ez eus c'hoazh un nebeudig familhoù hag a garfe kas dimp o bugale ar bloaz a zeu ma vefe tu da brometiñ dezho ur yalc'had-studi.Ne vo tu d'hen ober nemet pa vo klozet roll an dispignoù hag ar gonidoù evit ar bloavezh-skol a ren.

hor befe ivez da gempenn ur sal c'hoari ha labourat evit ar veilhadegoù,ar sul hag ar yaou.Lakaet e vefe anni peadra da labourat danvez,paper,kartoñs,koad ha houarn.Evit plijadur ha mad ar skolidi e pep kenver e vefe,anat eo.Gant an nebeudig a zo bet lakaet dija etre o daouarn o deus ijinat taou brav.

gant anaoudegezh vat an holl vinvioù,kozh pe nevez. hag an dafarou a vo kaset dimp.

MIL BENNOZH DOUS D'HOR MADOBROURIEN!
MIL BENNOZH DOUS DA SKOAZELLERIEK AR SKOL VREZHONEK !

Kont-red Post ar Skol Vrezhonek:"Abbé Le Calvez,Skol St-Erwan, PLOUEZEC. C D N. ROAZHON,863 85.



LEVRIOU EVIT AR VUGALE .

"ISTOR MEUDIG", "AR GOANTENN E KOAD AR C'HOUSK", "AR C'HASH GANT HEUZIOU LER", embannet gant "Al Liamm".

An tri levriñ-mañ a zo breudeur d'ar pevar a zo bet endev embannet gant "Al Liamm" hag a zo bet barutallet amañ e koulz. Implijet ez eus bet ur sternañ lizherennoù disheñvel evit ar skrid,pezh a vez atav evit ar vugale,daoust ma'z eo etnoco'h ar c'hentañ ha bihanoc'h an eil re.

Tamallet ez eus bet d'an troer ober betek re gant rannyezh Douarnenez ?Div wech hepken,hag en "Istor Meudig" em eus kavet ar stumm "voc'h" evit "viot".

Ne blij ket din avat an dro-lavar-mañ hag a zo da nebeutañ luziet:"N'en doa ar roue ken azezañ ouzh taol d'ober da vezañ servijet"("Ar C'hazh...");ha houmañ:"Gouest da cheñch en ul loen bihan"(ib.).Ar voc'h e ka- van lavarout:"gouest da vont d'ul loen bihan",pe c'hoazh:"gou- est da gemer stumm ul loen bihan".An dro-lavar-mañ a zo dirizh: "pa yae kuit"(ib.)Geriou brezhonekoc'h,ha ken anavezet a zo evit "pichoned,paseet" (" Ar Goantenn...") ha "chakod" ("Meu- dig...")dibluat a zo skañvoc'h eget "displumañ"("Ar Goantenn!")

An troer en deus ijinat (?) ur ger nevez evit brodequin:"botou-kinou" ("Ar C'hazh...") ha brezhonekaet un tamm muic'h ar ger " voulouz" a zeu gantañ dindan ar stumm: "Boulouz".("Ar C'hazh...")

Pa skriver levrioù evit ar vugale vihan ez eo da implijout ar muic'h ma c'heller geriadur ar "Brez- honeg Ekin" ha sentiñ ar relennoù savet gant Ernault ha Vallee.

"AN AZENNIG BIHAN", "AR HONIKLIG B.UDEDEO", embannet gant "Emgleo Breiz".

Ar vugale a gavo plijusoc'h moarvat an daou levrig-mañ eget re "Al Liamm".Brasoc'h eo o ment,ar skeudennou a zo gwelloc'h,hag al lizherennoù brasoc'h ivez;dres ar pezh a zo ezhomm evit sko- lidi bihan hag a zo o teskiñ lenn.Gant ur skeudenn war bep pa- jenn ez eo aessoc'h displegañ ar gontadenn hag anaouñ er vuga- le ar c'hoant da lenn ar skrid a zo dindan.

Tamall a c'hallfed ivez d'an troer bezañ implijet re a c'herioù rouez pe rann- yezhellevel el levr "An Azennig Bihan":grageilhad (p.5),ar ri- cher,didrapet (p.7),dispaha,fuha (p.9),lêz-lipig,lêz-chug;al levr "ar Honiklig...":gwadorchig,nozvez mordo,ribitalh.Evit tañva saour ur rannyezh ez eo ret hec'h anavezout tamm-pe- damm;ar vugale int a gav o diduamant er gonta denn.

An daou levrig-mañ a zo bet embannet e "Skol-

veureg". Hervez kont, ez eus bet klasket teste ar yezh skrivet ouzh ar yezh komzet. Tra ziaes da seveniñ, en gwirionez, pegwir pep parrez hogos he deus he distagadur. Me a skrivfe, da skouer: "dour vresk" ("an azennig...", p.3), "komzou yur" (p.6), "zell ouzh Bitumig" (p.7), zentus (p.7), "buan e gent" (p.8), "ar voenneg" (p.9), pegement a oap (p.11), "a chom" (p.13), "te zo Zentus" (p.16), "Feiz, ya zur". Ur wir strouezheg eo ar c'hemmadur 3/2, ha setu perak, moarvat, n'oa ket net Vallee d'en em goll enni.

Skrivañ a reer : "nadoz-êr, êz, lêz, mêz," met "kaer", hag e meur a lec'h; n'eo ket eta ur "fazi". Perak an diforc'h-mañ ?

Daou pe dri fazi a zo ivez en destenn, d'am soñj da vihanañ: "diâz a vezo", ("An Azennig..." p.5), "gortoz na roan dit" (p.16, ib.), da hluda (p.19), "un nozvez mordo" ("ar Honiklig..." p.7)

Nota Bene. Levrioù "Emgleo Breiz" a zo troidigezhioù diwar rummad HIAS anvet : "PAPILLONS", evit bugale etre 3 ha 6 vloaz. Le vrioù "Al Liamm", diwar ar ummad: "Les Contes du Gai Pierrot", en hevelep ti, evit bugale etre 6 ha 9 vloaz.

H O R - B O E S T L I Z H I R I . K E N N E T U D I .

digant RH(22.7.57) "Emaon o paouez kacut niverenn "SKOL" diwar-benn kudennoù Bro-Slesvig. Seblantout a ra din bezañ dudius-tre. Ur pennadig a savan evit ar BUD KULTURK. N'em eus ket bet amzer da lenn pep tra, hogen mat e ka- van an darn vialañ eus ar gerioù etrevroadel a implijit. Koulskoude ne gavan ket "minoriteenn" gwall vrac; "minorelezh" pe "minorited", ne vefe ket bravoc'h. Marteze "binanniver" ???

digant P.D.(28.8.57) "Va gourc'hemennoù evit SKOL diwezhañ. Labour vat: reiñ d'ar Vretoned tu da zeskiñ traoù dre ar Brezhoneg. Hefval al labour-se ouzh ar re all diwar-benn ar skolioù e Kembre, e Friz... reiñ a reont e brezhoneg gouzigezh na c'heller ket dastum e galleg. Brezo e teu ar brezhoneg da vezañ ur yezh a dalvoudegezh skiantel."

digant P.P.(8.10.57) "Lennet em eus gant dudi niverennoù ho tastumadenn, ne ouien ket e oa SKOL ken dudius. Ho studiadennoù diwar-benn ar gelennadurezh divyezheke e Kembre, Frizia ha Bro-Slesvig am eus kavet mat-tre, ha pouezus e pep kevner, hag a glot mat ouzhpenn gant ar pennadoù embannet e-barzh "Al Liamm"; an hini wellañ a zo, d'am meno, ho niverenn diwar-benn ar Slesvig: sklaeroc'h eo an destenn eget an hini diwar-benn Frizia, hag un druez e oa houmañ ronekskrivet fall. Bourrot em eus ivez gant ar rimadelloù hag an divnadelloù, reoù' zo an eus soñj bezañ klevet gant va zud-kozh.

Sp! am eus e raio berzh ho skol nevez, ha laouen on da gas va skodenn, pegwir n'em eus ket bugale da lakaat enni.

digant ur Breur.(11.10.57) Daoust m'emaon e Bro-Normandi e c'hellan labourat evit ar brezhoneg memes tra rak ar "Skolastikad"-mañ a zo ivez evit Breizh-Izel hag un hanter bennak eus hor skolidi a zo Bretoned. Deut on da-benn da sevel kentelioù brezhoneg evito, savet hon eus ivez ur "bagadig sonerien."

T A O L E N N " S K O L " I . r u m m a d n e v a z .

SKOL SANT-ERWAN.

An Eil Erv

ENVORENNOU UR MESSTR-SKOL, gant Armañs Ar C'halvez.

- I. Eizh vloaz a stourm en ur skol c'hallek.
- II. Ur C'hammed war-du ar pal.
- III. Krog omp hepken.

Dielloù:

BUHEZ AR SKOL VREZHONEK, gant an Itron Galbrun.

- Orin ar vugale.
- An Amzer gouestlet.
- Ar Bañsionidi.
- An Danvezioù kelennet.
- Emzalc'h an dud dre vras e-keñver ar skol.
- Hon diaesterioù, hon ezhommoù.

TESTENNOU: UN DASTUMAD LIZHIRI.

- Un doare skol vrezhonek gortozet gant kerent.
- Talvoudegezh an Oberenn.
- Diaezamantoù.
- An Danevell-mañ a zo gortozet.

HOL LABOUR BARNET GANT KE GENT HOR SKOLIDI.

KUDENN AN ARC'HANT....

- Roll ar profoù hag ar skodennoù.
- Kudenn an arc'hant.

LODENN AR GELAOUENN.

- Kaivoù.
- Gourc'hemennoù
- Pedet omp d'embann.
- Levrioù evit ar Vugale.
- Hor boest-lizhiri; kenstudi.

Liesskrivet e ti HERVE AR MEE, 32, stradaed an Ta-d-Bourdon, ROAZHON.

Heñer ha merour: Armañs Ar C'halvez, Skol Sant-Erwan, PLOUEG-AR-MOR.

p.8.

p.3
p.8
p.11.
p.12.

p.15
p.15
p.17
p.18
p.20
p.21.

p.22.
p.23.
p.24.
p.25.
p.26.

p.25.
p.26.

p.1
p.10.
p.14
p.27
p.28.

